

AR MERC'HEDE KUSTUMET DA EVAÑ GWIN-ARDANT
Les femmes habituées à boire de l'eau-de-vie

Bremañ p'emaon disoursi, e kavan un tamm amzer
P'emañ daspugnet an eost, lakaet e-barzh ar solier

P'eo deuet e-barzh ma spered da gompoziñ ur son
Na war sujed ar gwiragez, merched deus ar c'hanton

Na war sujed ar gwiragez hag ar merched yaouank
Na pere a zo kustumet da evañ gwin-ardant

Na pere zo kustumet da evañ odivi
Obijet mat eo o gwaz da zivall deus oute

Evit diwall d'ar gomer prest da foetañ an arc'hant
Evit ampechiñ ar gomer da gaout ar pezh he deus c'hoant

Mes ar gomer a oa fin, gouzout a rae he doare
Ur ser-lagad a rae d'he gwaz ha netra ne ouie

Bep ar mare deus ar sizhun e legouezhe ar miliner
Dre un devezh mat o'ch deuet n'emañ ket Yann e-barzh ar gêr

Miliner pignit e-barzh ar gambr evit kargañ ur sachad
Me ho ped eta miliner, kas anezhañ din d'ar marchad

Met c'hoazh ho avertisan a-raok ez it er-maez deus ma zi
Nompas lâret ger da zen, ni hon eus odivi

An deiz war-lerc'h d'ar Chastell-Nevez an div gomer en em gavont
Deomp da dapañ bep a vannañ evit tenniñ hor seched

*Maintenant que je suis serein, je trouve un peu de temps
Puisque la moisson est rangée et mise dans le grenier*

*Puisqu'il m'est venu à l'esprit de composer une chanson
Au sujet des femmes, des filles du canton*

*Au sujet des femmes et des jeunes filles
Qui ont l'habitude de boire de l'eau-de-vie*

*Qui ont l'habitude de boire de l'eau-de-vie
Leurs maris sont obligés de faire attention à elles*

*Pour se méfier de la commère prompte à gaspiller l'argent
Et empêcher la commère d'obtenir ce qu'elle veut*

*Mais la commère était fine, elle savait y faire
Elle faisait un clin d'œil à son mari et il n'en savait rien*

*Régulièrement en semaine, arrivait le meunier
Vous voilà arrivé un bon jour, Yann n'est pas à la maison*

*Meunier, montez dans la chambre pour charger un sac
S'il vous plaît meunier, amenez-le pour moi au marché*

*Mais je vous avertis, avant que vous sortiez de la maison
Ne dites à personne que nous avons de l'eau-de-vie*

*Le lendemain à Châteauneuf, les deux commères se retrouvent
Allons boire des chopines pour casser notre soif*